

CANTIQU SANT BREVEN

PATROM PARRËS BERNÉ

PROTECTOUR EN ÈD, ER FRÈH.

Quetan discan :

Dré hou sicour, ô sant Breven,
Guet Doué hun Tad ni e houlen
Eit hun inan bep sort græceu,
Èd caër ha fréh eit hun parqueu.

Eil discan :

O sant Breven, patrom câret,
A lein en néan hur chilaouet;
Goulennet eit hou pugalé
Bihuein, merhuel é peuh guet Doué.

1. Sant Breven, amen inouret,
Èr vro a Sax e zou gânnet;
È dud crechén, guet caranté,
En dessauïas é doujanç Doué.
2. Monnet e hras de Vréh-Ihuel
Eit disquein guet ménéh santel
Penaus quêrhet é hênt en néan
È cârein Doué hag en nissan.
3. Avel én noz ur stéreden
E splanné santeleah Breven.
Eid arhescop pe vou choéjet,
Er sant hemp quin e vou souéhet.
4. Er bugul mad guet caranté
D'é zevet e hras é vuhé.
Peur ha pinhuic én é galon
E gavé nerh, confort, pardon.

5. Ur gouyan calet e saüas,
 Êd, gùé, lônnet e zismantas.
 Ê rein sicour é varhue Breven,
 Prest-é én néan é gourônne (1).
6. Doué inouras é relègueu
 Dré un nombr bras a viracleu.
 Ur laër êd eit hai direspét
 E gollas oll é êd laëret.
7. En dud peureit guet er guernans
 Guet Breven houlennei bihuans
 En dud guet hou mampreu poéniet
 Guet hou vezei divaheignet.
8. Chilaouamp penaus sant Breven
 E breguei d'er labourisien:
 Gouriad er gué zou ou buhé;
 Buhé er vro e zou er fé.
9. Red-é amzao hun Doué hemp par
 Zou mæstr de fréh, de êd en doar,
 Mæstr-é d'er glao, mæstr d'er séhour;
 Nameit dré Zoué é tall labour.
10. Dré Zoué hur gùé za da vleuein;
 Êd hor parqueu za da gresquein.
 En dianès, er puillanté
 E zou idan é volanté.
11. Red-é amzao er parq, er prad,
 Caër hun bou ni ou labourat
 En dès dobér ag en amzér:
 Chonjet é Doué, queih labourér
12. Pe vé bet poèn ar dro en doar
 Liès én æst é vé glahar;
 Guet Doué, er zent, ni bou sicour;
 Ne lausquint quet coll hur labour.

(1) 26 à vis æst 760, é Cantorbéry.

13. Petra zou caus den oll drougueu
Nameit en diaul, er péhedeu?
En dud, en doar, zou ar fallad
Gaust da béhet hur quetan tad.
14. Er péhed zou el prenvét
Liès cuhet barh ur boquet.
Er péhed zou droug er hrechen
El er prenv vil droug er blanten.
15. Madeu collet dré er péhed,
Mar omp santel vou demp rantet
Clascamp en env, nitra de goll,
Bihuans hun bou zur ar en oll.
16. Diouallamp mad d'ancouat un dra.
Penaus en éd e zoug bara,
E zou limaj ur boued guelloh
E zischenn ag en env eid oh.
17. Er sacramant hag er beden
El parqueu lan a éd melen
D'er gristenien e ra græceu
Eit magadur ou inaneu.
18. Er zent e zeli bout credet
Hag ou exempleu heliet.
Der zent ni e zou bugalé,
Pedamb enta guet caranté.
19. O sant Breven, zavet hou préh
Eit goarantein hun éd, hun fréh;
Pelleit er prenv, er lôn noahus;
Pelleit doh emp amzér reüs.
20. Zellet doh emp, ô sant Breven,
Ha casset de Zoué hur peden;
D'oh en hum hloestramp a nehué
Ni vou fidel d'oh, tud Berné.
-

CALVÉR SANTÈS ANNA GANAH

DISCAN :

Dhor mam santès Anna,
D'an Itron Varia,
Dhor Salver beneguet
Ni vou fidel berpet.

1. Christenien hor baniel,
E zou croés hor Salver;
Zavamp er groés ihuel
Ne vern quet en amzér.
2. Inour, respet d'er groés
Guet hi gavimp pardon;
Ne bellamp quet jamæs
Er groés ag hor halon.
3. Er groés ér scolacheu,
En tyer, ér véred;
Er groés ar en henteu
Er groés d'hun heul berpet.
4. Ar en hent é tremen,
Dirac croés hur Salvér
Ni laro ur beden
D'hun diouall a zanjér.
5. Mab den en é vuhé
En dés berpet poénieu;
Arlerh Jésus guet joé
Ni zougou hur hroézieu.
6. Un dé, er barroués,
É creis er brassan gloér
Ni e gavou er groés,
Huelamp hiriú distér.
7. Jesus, Mari, Anna,
Accordet demb er hræç
Ma vehemp drés bep tra
Fidel berpet d'er groés.